

KIS-708 – Br. luc'honiezh, optik

(MME ha GE – 08 02 01, dalc'h dre bellgomz)

[MME] Er pennadoù embannet gant *Preder* e reer gwech gant *luc'honiezh*, gwech gant *optik*. Hag un diforc'h ster a lakaer etre an daou dermen ?

[GE] Reveziadenn gentañ Br. *luc'honiezh* a gaver e Da-64 [1964], p. 89 gant an despizadur : “studi anadennoù al luc'h”. Adkavout a reer ar ger e La-08 [1984], pp. 184-185 en droienn : “ur reizhiad luc'honiezh” hag e La-10 [1995], p. 282. Evit Br. *optik* zo reveziadennoù anezhañ e La-09 [1988], p. 65, e La-12 [1998], p. 295 hag e GEME. [2000], p. 155.

Atersañ a rez : perak bezañ degaset *optik* en tu all da / e-lec'h *luc'honiezh* ? An abeg zo da gavout e dedroadur an diskiblezh abaoe un dekvloaziadoù.

E hanterenn gentañ an 20th kantved e tremened gant despizañ Gl. *Optique* evel studi al luc'h hag ar gweled. Setu perak e kinnige VALLEE Br. *gweledoniezh*. E gwir, pezh a studied er gweled, treled al luc'h e meteier al lagad, ne oa nemet un dro dibarek eus treled al luc'h er meteier alvezel. Setu perak e voe dilezet Br. *gweledoniezh* ha degemeret *luc'honiezh*.

Hiziv avat e talvez Gl. *Optique*, Sz. *Optics* kement ha "studi treled ar skinadoù tredanwarellek (luc'h, skindredan, gwagennoù a-ere ouzh an elektron, skinoù kosmek, h.a.), o tougen war naouusterioù alvezel ar gwagennoù ha stad an danvez ouzh o ec'hodiñ, o zreuzkas, o lugañ, h.a.”.

Ober a reomp gant Br. *Optik* er ster-se ha, diouzh ret, gant Br. *Luc'honiezh* pa vennomp aroueziñ ar rann eus an *Optik* o plediñ gant al luc'h ent strizh. Lies rann all zo d'an *Optik* hervez ar savboent kemeret :

~ an *Optik mentoniell* (Gl. *Optique géométrique*) o plediñ gant treug ar skinoù (hag al lunioù o tisoc'hañ eus o lugadur) ;

~ an *Optik gremmel* (Gl. *Optique énergétique*) o studiañ ar bec'hiadoù gremm douget gant ar skinadoù, o dasparzh en egor, o gweredoù ;

~ an *Optik bevedel* (Gl. *Optique physiologique*) a c'hallfed envel ivez *Gweledoniezh* — en ur virout *Gweledouriezh* evit ar rann eus al *Lagadouriezh* (Gl. *Ophthalmologie*) a ra war-dro ar gweled ;

~ an *Optik pementadel* (Gl. *Optique quantique*) ;

~ an *Optik rannigel* (Gl. *Optique corpusculaire*), h.a.

Ur c'hemeradur all zo da Gl. *optique*, Sz. *optic* : "teskad ar ferennoù en ur c'hamera, ur banner, h.a." ; ober a reomp gant Br. *luc'honi* er ster-se (sl. GEME., p. 155). Alese e c'haller ober Br. (*ijinour*) *luc'honier* eus oberier (ha kenwerzhour) ar binvioù *luc'honiezh* (Gl. (*ingénieur*) *opticien*), micher disheñvel enta diouzh hini an arbennigour war an *Optik* pe Br. *optikour* — pe, strishoc'h, war al *Luc'honiezh* pe Br. *luc'honiour* (Gl. *opticien*).